

Paotred 6,7,8 vloaz

AR MESAER BIHAN

1.- Disul vin-tin' vel ma sa ren; ho! Di-sul vin-  
tin' vel ma sa ren Eur vouez dous a gle-ren e low-  
la. Eur vouez dous a gle-ren, ho!  
Disul vintin vel ma saven  
Eur vouez dous a gleven.

Eur vouez a gleven o kana  
E lez ar •'hoad tosta.

Ha dre al lann pa dremen'en,  
Bleuniou a gutuilhen.

Ha war bleg va brec'h o c'hasen  
D'an hini a garen.

Ouz ar c'hoad dre ma tostaen,  
He c'hlevet gwell a raen.

Met allaz! he c'hlevet a raen  
Hep kompreñ he sonenn.

Eur sonenn deut eus a Vro-C'hall  
Gant eun trouc'her segal.

Kerkent, va bleuniou ruz ha glas,  
Eus va dorm a gouezas.

Rak n'am boa ket o c'hutuilhet  
Vit eur verc'h ken desket.

Job ar Gleann.